


MATEMATIK - MENTONIEZH

EUS AR SKOUERGORNEG D'AN TRIC'HORN - 1

- 1) Tres ur skouergorneg DOUR 8 cm e hed ha 6 cm e led.
- 2) Tres e dreuzvegennoù DU hag OR.
Pegait eo hed DU hag OR ?

1



- 3) En ur poent e skej DU hag OR. Gra I ar poent-se.
Petra a c'hellez lavarout diwar-benn [DI], [IU], [OI], [IR] ?
Petra eo I neuze ?

- 4) Treset e 'c'h eus lunioù nevez e diabarzh DOUR. Peseurt anvad int ?

- 5) Pet tric'horn a welez el lun a 'c'h eus treset ? Klaskomp reiñ o anvioù.

- 6) Petra a c'hellez lavarout diwar-benn (peseurt perzhioù o deus) an tric'hornioù DOU ha DUR ? DOR ha ROU ?

- 7) Peseurt perzhioù o deus an tric'hornioù DOI hag RIU ? DIR hag OUI ?


MATEMATIK - MENTONIEZH

EUS AR SKOUERGORNEG D'AN TRIC'HORN : REIZHADENNOÙ

- 1) Tres ur skouergorneg DOUR 8 cm e hed ha 6 cm e led.
- 2) Tres e dreuzvegennoù DU hag OR.
 Pegeit eo hed DU hag OR ?

10 cm.

2




- 3) En ur poent e skej DU hag OR. Gra I ar poent-se.
 Petra a c'hellez lavarout diwar-benn [DI], [IU], [OI], [IR] ?
 Petra eo I neuze ?
- 5 cm int holl. Kreiz ar segmantoù DU hag OR eo I enta.
- 4) Treset e 'c'h eus lunioù nevez e diabarzh DOUR. Peseurt anvad int ?
 Tric'hornioù.
- 5) Pet tric'horn a welez el lun a 'c'h eus treset ? Klaskomp reiñ o anvioù.
 8 : DOU ha DUR, DOR ha ROU, DOI hag RIU, DIR hag OUI.
- 6) Petra a c'hellez lavarout diwar-benn (peseurt perzhioù o deus) an tric'hornioù DOU ha DUR ? DOR ha ROU ?
 Skouer eo DOU e O, DUR e R, DOR e D ha ROU e U.
- 7) Peseurt perzhioù o deus an tric'hornioù DOI hag RIU ? DIR hag OUI ?

N'int ket skouer. Keit eo daou eus o zuioù : tric'hornioù KEITGAREK ez int (divc'har keit ha keit o deus). Hiroc'h eo o DIAZ eget hini an tric'hornioù DOU, DUR, DOR ha ROU.

MATEMATIK - MENTONIEZH

EUS AR SKOUERGORNEG D'AN TRIC'HORN - 2

1) Tres ar skouergorneg IGOR 10,5 cm e hed ha 6 cm e led :



3

2) Petra a c'hellez lavarout diwar-benn an treuzvegennoù IO ha GR ?
 Gra D eus o foent skej. Muzuilh [ID] ha [DO], [RD] ha [DG]. Petra a verzhez ?


3) Petra a c'hellez lavarout diwar-benn ar skouergornegoù DIG ha DOR neuze 'ta ?

4) Petra a verzhez diwar-benn ar skouergornegoù DIR ha DOG ?

MATEMATIK - MENTONIEZH

EUS AR SKOUERGORNEG D'AN TRIC'HORN - 2

1) Tres ar skouergorneg IGOR 10,5 cm e hed ha 6 cm e led.



4

2) Petra a c'hellez lavarout diwar-benn an treuzvegennoù IO ha GR ?
 Gra D eus o foent skej. Muzuilh [ID] ha [DO], [RD] ha [DG]. Petra a verzhez ?

6 cm int holl. D zo en o c'hreiz.

3) Petra a c'hellez lavarout diwar-benn ar skouergornegoù DIG ha DOR neuze 'ta ?

Keitgarek int.


4) Petra a verzhez diwar-benn ar skouergornegoù DIR ha DOG ?

Par eo o 3 zu. KEITTUEK ez int.

MATEMATIK - MENTONIEZH

EUS AR SKOUERGORNEG D'AN TRIC'HORN - 3

- 1) Soñj hon eus ez eo ur c'harrez ur skouergorneg dibarek : par e holl duioù.
Tres ar c'harrez KARE 10 cm e duioù.



5

- 2) Tres e dreuzvegennoù KR hag AE. Gra Z eus o foent skej.
Ha gallout a c'hellez lavarout penaos e kenskej AE ha KR er poent Z ?

- 3) Petra a c'hallimp lavarout diwar-benn AZ ha KR ? Diwar-benn EZ ha KR ?

Sav an tric'horn eo a reer eus ar segmant a ya eus beg an tric'horn hag a skej a-skouer an tu enep.

Amañ : AZ zo sav an tric'horn KAR peogwir ez eo kenskouer AZ ha KR e Z.

- 4) Tres savoù an tric'hornioù KAZ, ARZ, KEZ hag ERZ o loc'hañ eus Z.
5) Gouzout a reomp ez eo AZ unan eus savoù an tric'horn KAR. Met...

Tri beg en deus un tric'horn, ha neuze tri sav.


Souezhus : klask an 2 sav all eus an tric'horn KAR.

MATEMATIK - MENTONIEZH

EUS AR SKOUERGORNEG D'AN TRIC'HORN - 3

- 1) Soñj hon eus ez eo ur c'harrez ur skouergorneg dibarek : par e holl duioù.
Tres ar c'harrez KARE 10 cm e duioù.

6



- 2) Tres e dreuzvegennoù KR hag AE. Gra Z eus o foent skej.
Ha gallout a c'hellez lavarout penaos e kenskej AE ha KR er poent Z ?

A-serzh.

- 3) Petra a c'hallimp lavarout diwar-benn AZ ha KR ? Diwar-benn EZ ha KR ?

Kenskouer ez int.

Sav an tric'horn eo a reer eus ar segmant a ya eus beg an tric'horn hag a skej a-skouer an tu enep.

Amañ : AZ zo sav an tric'horn KAR peogwir ez eo kenskouer AZ ha KR e Z.

- 4) Tres savoù an tric'hornioù KAZ, ARZ, KEZ hag ERZ o loc'hañ eus Z. (Gwel. a-us)

- 5) Gouzout a reomp ez eo AZ unan eus savoù an tric'horn KAR. Met...

Tri beg en deus un tric'horn, ha neuze tri sav.

Souezhus : klask an 2 sav all eus an tric'horn KAR : KA, RA.